

C A N T I Q 215

ITRON VARIA AR FOLGOAT,

*Tar ar malheur eruet er bevare sul a vis Meurs 1708.*

Var ton Santez Anna ar Palud.

ASISTANTET honorabl, a bep seurt qalite,  
imploromp a vir galon ar c'hraç digant Doué  
D'ober eur recit fidel eus eur malheur c'hoarvezet  
ibars Ilis ar Folgoat er c'hanvet tremenet.

Petra a droubl va repos? pe seurt sqeut a velan?  
Deut ê creis an anter-nos.... pe seurt cri a glêvan ?  
esus, en tan estiamus, a velan anflamet:  
Se ya en hano Doue feteis sur da velet.

Aotrou Doue. va C'hrouer, trist ê an accident;  
Itron Vari ar Folgoat, prest e teu chenchamant:  
Rema eus c'hoec'h mis c'voemp joaïis bras er pardon,  
Hag a ben ar c'hoec'h mis crenn e glac'har hor c'halon

Fonta ra va daoulagad, ho muriou benig'et,  
Eus o guelet dizolo gant an tan rainet.

Dèvet oc'h oll dorojou, ho quer a zo strinjet,  
Ar plom, ar vein, an ermach var ho tro zo poazet.

Penos e pad va c'halon da antren en ho ti,  
Fa ne velan oc'h imach, alias ! Guerc'bez Vari,  
Nag hini ho mab Jesus, nag ho m'a benig'et,  
Na figur, na tabernacl, na taole all ebet.

O cston ! ô tra estranch ! ô cas epouvantabl !

Oll draou sacr Mab quer Doue, hor Zalver adorabl,  
 Me lavar an oteriou, a velan tout fraillet;  
 Aman e souffr va ene hag e troubl va speret.

O estlamou furius ! ô flamou didruez !  
 C'houi poa guethal respectet, balamour da Zoue,  
 Tri grouaduric santel e fournes Babilon ;  
 Pelêc'h ema ar respect a dlefac'h d'hon Itron ?

Mar plij ganêc'h acordi, Rouanez an ênvou ,  
 Eur c'hraç c'hoas d'o servicher, m'er goulen gant daelou,  
 Perac en deus permetet Doue oll buissant,  
 Na c'hqui, Guerc'hez ar Folgoat eur bers qen deholant.

Va mab ha va servicher, va c'hliant, va c'breder,  
 D'an oll e ve inutil e ouffe den ebet  
 Petra en deus alumet an tan goaï em Ilis ,  
 Mës. bërema me laio déch' perac er permetis.

Me vele eus an ênvou assambles gant Doue ,  
 Dre zicout ar sclerijen eus an Eternite ;  
 Va Iliz paour o têvi dre valiç Satanas ,  
 Ha qerqent en he guelis savet gant eur gloar vrás.

Ar bêvare zui a vis meurs pehini zo prezant ,  
 Eus a vlavez ar biseost mil eis blas ha seis cant ,  
 E c'hoarvezet ar malheur en Ilis ar Folgoat ,  
 Assur ctis vez ar galon na deuse da dristat.

Doue a lêzas guechal ar prinç Nabusardan  
 Da bïlla ha da laqat e ludu hag e tan  
 Ar gær a Jerusalem ha Templi sacr Salomon ;  
 Ha Nabucodonosor da zistruch ar gær a Vabilon.

Eur vechall e permetas d'ar prinç Anthiocus ,  
 Eun al da Vespasien dre zorn e vap Titus ,  
 Dezoli an Templi sacr balamour d'ar pec'her

A rent ennan ha var e dro ha partout dre ar bed.

Un den a zo badezet a zo preciuissoc'h,  
Ornet a bep seurt graçou hag eur pris huelloc'h;  
Coustet qesoc'h da Zone, ba m'ar deu da bec'hi,  
Diessa tra zo er bed é dont d'e repai.

Mes c'hoas Guerc'hez ar Folgoat, penos eo e qeset  
Ho cloar hag ho plijadur en ho ti ruinet;  
Aon ameus, ô va Itron ! va Mesurez adorabl,  
Na dijêzac'h ar Folgoat en ur stâd pitoyabl.

Esper, va zervicher paour, ha consol da sperer,  
Me vel mil ene devot o tonet d'e guelet.  
Leun oll a volonté vad, carg'et a ofrançou,  
Ember e gueli adare goloet he muriou.

Me ameus bars er bares demeus a Vicelle,  
Bars en escopți Leon ebars en eur c'hontre,  
Nombr eus a favoriset hag a zo puissant  
E qement seurt materiou, en aour hag en arc'hant.

Me ameus bet consolet en o affliction,  
Da gals emeus exocet dezirou o c'halon,  
N'o deus qet ancounac'het va graçou tremenet,  
Hag o deus c'hoas esperanç en amzer zonet.

Ar fenix a yaouanqa pa ve scuis gant cosni,  
En em expos da vernel evit nem dêvi;  
Neuze demeus e ludu nem form a neve,  
Hag en Iliz ar Folgoat é bet c'hoarvezet se.

Itron Vari ar Folgoat, troit ho taoulagad  
Ouz ar peleñinet paour a zeui a galon vad  
D'oc'h Iliz eus ar Folgoat gant guir devotion,  
Roit dê, Guerc'hez gloriis, ho penediction:

# DISCOURS

**EVIT GOULEN EUR PLAC'H DA EUREUJI.**

*Ver un ton Comedi.*

**S**ALUT, compagnuez, gant ur galon ardant,  
**D**eus a greis va c'halon e ràn va c'homplimant.  
**M**a c'houvejen an tu, ar fèçon d'e ober,  
**E**voa va brassa joa plijout d'oc'h oll douster.

**P**eb action gaer d'e ober pa zeomp ,  
**D**re ar Sin eus ar Groas ato e commançomp :  
**E**n hano an Tad, ar Mab hag ar Speret-Glan ,  
**Z**o tri ferson distinct en eur memes unan.

**A**baoue ma voan bian var brec'h va mag'erez ,  
**M**e am boa an desseign da antren er pales ;  
**M**es aru ê an deiz , an amzer er vech-màn ,  
**M**a meus bet an henor da zont bête ennàn.  
**E**vit beza hirie antreet en ho ti ,  
**N**'ouzoc'h qet , marteze , tenor va c'hezredi :  
**M**e zo ur messajer zo amàn digasset ,  
**Q**azi hep gout an hent gant an den a euret.

**M**es pa zon digasset deus e beurs o pete ,  
**M**e a rai e excus ha va ini ive.

**Q**ent avanç davantach , ec'han d'en em adressi  
**D**éc'hu , ô va Jesus , hor C'hrouer , hor Messi .

**C**'houi eta , va Jesus , a rei din ar speret  
**D**a expliq'a pep tra evel ma zeo dleet ;  
**C**'houi a rei din ar c'hraq , pouyoar hag eloqanç ,

Sclêrijen d'am speret da gomz en ho prezang.

Va bolonte ha va dessign eo hirie zu de  
Da anonç déc'h..... evit ar guir roue,  
Mes c'hoas e c'houennan da rouanez gantam  
..... ar verc'h..... deus an ti-màn.

Eh bien, plac'h yaouanq, enem strinquit d'an daoulin.  
Da c'houl benos ho tad qent mont da euteuji;  
A beurs Doue an Tad c'eo demp ordrenet  
Ne anconeomp qet nep en deus or mag'et.

Benos Doue an Tad a c'houlan da g'enta,  
Guir Grouer eus an ên, Gouarner ar bed-ma;  
Mes guelet a ran c'hoas, pa remetqan erfat,  
Penos e que daerou demeus ho taoulagat.

Neqet ar pez oc'h eus grêt eo o gra contristet  
Mes guelet ho tad, ho mam penos int dezolet.  
Allas ! râzon o deus, ne de qet hep sujet,  
Guelet e teut da guitat nep ne deus o mag'et.

Gant qement eus a soign savet bete vremàn,  
Qemense a laqa ho calon d'e ouelân.  
Aisa, tad truezus, distroit ho taoulagad  
Var ho merc'h..... a c'houlen he mennat.

Émedi d'an daoulin dirazoc'h prosternet,  
Deus a greis he c'halon o c'houlen he souet.  
Ha c'houi, mam dezolet, roit ho penos ganti,  
Gant ho merc'h..... da eureujî. Ia, ia, ia.

Hola ta..... aoualc'h ê qemense,  
Oboissct oc'h eus da c'hourc'hemen Doue;

**G**rêt oc'h eus ho tever gant guir humilite,  
**H**a Dôue ne c'houlen nemet guir volonte.

Eh bien. .... plac'h fur ha disqet mat,  
**A**vancit ho pasiou evit mont bete ho tad,  
**H**a roit dezà daou boq eus a greis ho calon,  
**P**a oc'h eus obtenet e venediction.

Distroit c'hoas eus ar vam pini neus o canet,  
**O**livret da zemezi pa oc'h eus souhetet;  
**M**es c'houi ta, iad ha mam meurbet oc'h contristet,  
**O**cazion oc'h eus, n'en deo qet hep sujet.

Mes ho merc'h a zo fur, instruet mat e ze,  
**H**a ne deus grêt netra enep ho polonte.  
**Q**ent avanç davantach, me c'houlen eviti  
**C**onje he breur, he c'hoar, qent mont da eureuji,

Paeron ha maeronez, mar emaint var ar plaç,  
**M**e c'houlen eviti o penos dig'enac'h.  
**C**'houi o poa contractet en iliz eviti.  
**H**ag hi c'boul ho penos qent mont da eureuji.

Benos he oll ligne, conje he oll g'erent,  
**S**etu ar seul sujet ma omp-ni deut en hent.  
**B**enos ar re zo maro n'allàn qet da c'houlen,  
**R**ac cals a galonou contrast a laqafen.

**G**uell ezeo eur beden d'ar re zo decedet,  
**E**vit goul o c'honje pa na maint var ar bed;  
**D**re ze en ho pedan da lavaret g'enem  
**A**r salm eus an Iliz e repoz d'o ine. *De profundis,*  
**A**rsa, compaguinez a zo amañ prezant,

Me zezir ar bonheur d'o renta oll costant ;  
 Mes nemeus qet , sioas , speret an oll æle ,  
 Da gontanti peb-unan herve e volonte.

Ma'm bije ar pouvoar en devoa Alexandri ,  
 Pa voa bet prizonier er g'ær eus a Vitri :  
 Ennes a zisqare , gant moes e drompillou ,  
 Seis murail simantet en dro da Jerico.

P'otramant ar studi en devoa Josue ,  
 A laze en combat seis ha trègont rous ,  
 A arrête an eol un heur anter en ær ,  
 Pa voa o combati vit rei dezàn sclerder.

P'otramant ar furnes en devoa Salomon ,  
 Pe an talanchou caer deus an doctor Ciceron ,  
 Me sojje un discours a vije d'ho souhet ,  
 Nonpas deus an anter ar pes a veritet.

Eh bien , compagnunes , enem rejouisset ,  
 Setu bet deomp an hini pini'r boamp deziret ,  
 Hag hi quer caer hag an de pe an eol ardant ,  
 Memeus hor c'halonou a rento oll contant.

Car e hini e unan zo pareillamant zo g'îê  
 Vel ma ve an deillou er gue e fin mis mae ,  
 Memeus qen a zoanj din an devez a hirie ,  
 E deveus astennet deg blaves va bue.

Giaç demp d'enem velet er pales celestiel ,  
 En hano an Tad , ar Mab hag ar Speret-Santel ,  
 Eno gant hon æl-mat ni vo reprezantet ,  
 Pa yo ret renta cont dirac Salver ar ar bed.

E vo kennet an decret hep on favorisa ,

Demeus o meritou vo barnet peb unan ;  
 Eno na gaqeto nag honont nag homàn :  
 Aoalc'h or bezo tout d'enem justifia.

Mar emeus choqet den dre re a liberte ,  
 E c'houlàn mil excus digant ho majeste ;  
 Mar emeus choqet den na drouc laret netra ,  
 Deus a greis va c'halon excus a c'houlennàn .

Arsa , Compagnuez , ha na drouc sonjet qet ,  
 Na laret goude se e meus me e laeret ;  
 Bet emeus ho conje , gant ho permission ,  
 Me o trugareca eus a greis va c'halon ,  
 M'o ped d'am asista evit e c'hundai ,  
 Ma hefomp gant henor de t'has da eureuji .

**F I N .**